

AR VERC'HIG DALL

GWECH ALL E MEUS AN - VE - ZET EUR VERC'HIG VI - HAN DALL, NE
 NE - LAS DEN EUR C'HROU - A - DUR KEN FUR HA KEN KOANT ALL. D'AR
 SKOL E KER - ZE BEM - DEZ DAL MA C'HELLAS BA - LE, HAM -
 BROU - GET PEN - DA - BEN HE ZRO GANT DORN AR VU - GA -
 LE. BEP MINTIN GRET GANT DOU - E DA - VE - THI E HAS -
 TENT DA C'HOUT PLOU HE CHAS - FE WAR RAOK DRE HOLL DRO - IOU AN
 HENT. KOMZ A RENT DEI EUS KAER - DER AR MOR GLAS O KOENVI
 EUS AN AOD HAG AR ME. HE - ZIOU, SI - WAZ, DAL -
 LES OA HI.

I

Gwech-all e meuz anvezet eur verc'hig vihan dall;
 Ne welas den eur c'hrouadur ken fur ha ken koant all.
 D'ar skol e kerze bemdez, dal ma c'hellas bale,
 Hambrouget penn-da-benn he zro gant dorn ar vugale;
 Bep mintin graet gant Doue davethi e hastent,
 Da c'hout plou he c'hasfe war raok dre holl droiou an hent.
 Komz a rent d'ei eus kaerder ar mor glas o koenvi,
 Eus an aod hag ar menezioù... Siwaz, dalles 'oa hi!

II

— « Komz a ra va mignoned diwar-benn an aër sklêr.
 Pe diwar-benn ar wazig dour a red 'mesk ar reier;
 C'houerzin a ran pa c'houerzont o komz eus ar wabren,
 Kaer dispar evel eur bed all, uhel a-uz d'am fenn;
 C'houerzin a ran pa glevan eman 'n heol o para,
 Laret a rer e teu e sked da laouennaat pep tra...
 Met alies e welan en kuz goude c'houerzin,
 Dre n'hellan gwelet liou an heol, rak dalles 'oun, goul... »

III

« Bemdez 'c'ha ar vugale da glask bleunioù c'houez vad
 'Vit kinnig d'in leiz o douarn tensor kaëra ar prad;
 Goude n'hall va daoulagad tanvad o liwioù kran,
 Anaout a ran ar rozen flour hag al liliën c'hlan
 Met klevet e meus konta e zo dreist d'ar Stered
 Eul liorz kaër 'lec'h ma c'hellin da viken o gwelet...
 D'an zre pa vin 'n em gavet en llo'z an Dudi,
 Me 'guntallioù bleun 'n eur gana, rak Dalles ne vin mui.

Henneleket diwar ar c'hemraeg
 gant Fanch GOURVIL.